

# TELEN REMENGOL <sup>(1)</sup> *Joy Min*

War don : *Gralon ha ker Is.*

Ne oan c'hoaz nemet eur bugel,  
Me gare va bro Breiz-Izel ;  
Me gare va bro Breiz-Izel,  
Bro ar feiz hag an dud santel.

Gant va mamm eun deiz da zao heol,  
Me ieaz da bardon Remengol,  
Me ieaz da bardon Remengol  
Da bedi Gwerc'hez REMED-HOLL (2).

Mont a reamp dre goad ar Rannou,  
Pa gleviz huanadennou :  
Klevet a riz en eun derven  
O son truezuz eun delen.

Ha dre ma zone ann delen  
E sao diraz-oun eur skeuden ;  
Skeuden wenn kan sant Gwenole  
A gomz evel-hen ouz-in-me :

- Setu telen aour Remengol,
- Dilezet ama gant ann holl,
- War ann delen-ma kaourintin,
- Gralon, Herve, Efflam, Trifin,
  
- Gwenole, Primel ha Gweneal,
- Barzet Breiz en amzer gwechal,
- D'ar Werc'hez a gane gwerziou,
- Ha da sent Breiz meuleidiou.
  
- Barz, kemer telen Remengol,
- Kan gant hi, ha lavar d'ann holl,
- Lavar ar burzudou zo bet
- E Breiz en amzer dremenet. »

Raktal e nijaz ar skeuden,  
Ha me da zon gant ann delen ;  
Landevennek am euz kanet,  
Bro ar zent hag ar rouaned.

Mene-Hôm, mor Douarnenez,  
Ker Is hag ar brinsez Ahez,  
Iliz veur Gemper ha Krozon,  
Ann *Eskop gwenn*, den a galon (3).

(1) *Telen*, harpe, instrument de musique en forme de triangle et à cordes.

(2) La Sainte Vierge est honorée à Remengol, sous le vocable de *Notre-Dame de Tout-Remède (Itron-Varia Remed-Holl)*.

(3) *Ann Eskop gwenn*, Mgr Joseph-Marie Graveran, évêque de Quimper, mort en odeur de sainteté le 1<sup>er</sup> février 1855.

L.-P.-M. LESCOUR,  
Barde de N.-D. de Remengol.

Hag ann daelou em daoulagat,  
Kanet m'euz Rosdren ha Bulat,  
Gwerc'hez 'n Esperanz Zant-Briek,  
Me a meuz kanet kalonek.

Itron-Wir-Zikour, en Gwengam,  
A meuz meulet a neve flam ;  
Ha daoulinet en he iliz  
Hi 'meuz pedet evit Breiz.

Karet a meuz a greiz kalon,  
Feiz Breiz-Izel, feiz koz Gralon,  
Ar zent hag ann dud kalonnek,  
Ha flemed *ar re divezek*.

Ho karet, meulet meuz dreist holl,  
Gwerc'hez sakr, Itron Remengol ;  
E c'harz ho treid, gant va feden,  
Me laka brema va zelen.

Dont a rai c'hoaz tud kalonek  
Da zon gant hi e brezonek,  
Da zon gant hi toniou zantel,  
N'enor Patronez Breiz-Izel.

Va bleo gwen 'lavar d'in brema  
E tosta va heur diveza ;  
Gwerc'hez, c'houi a dolo evez  
War bez ho parz, ho pugel kez.

Ra vo meulet dre ar bed holl  
Ho hano, Gwerc'hez Remengol ;  
Gwerc'hez vad, Itron Remengol,  
Mirit oc'h Breiz da vont da goll.

Mamm ann dud paour, klanv, ankeniet,  
Mamm ar Varzed, ar Vretoned !...  
Kasit ac'hanomp d'ann envou,  
Da veuli Jezuz hon Aotrou.

Jesuz, maestr ann env, ann douar,  
Zo maro war menez Kalvar ;  
Jesuz, Doue ar Vretoned,  
E Breiz c'houi vo Doue bepret.

L.-P.-M. AR SKOUR,

Barz ann Itron-Varia Remengol.

# PLAC'HIK EUSSA

In te, Domine, speravi. (Ps. 30, v. 1.)

War ton : *En deiz kenta euz a viz du,  
'Tisken ar Zaozon en dour du.*

'N enez Eussa, oa eur plac'hik,  
Iaouank, fur, koant 'vel eunn elik. (bis)

Iaouank, fur, koant 'vel eunn elik ;  
He hano oa Kaourintinik. (bis)

Siouaz ! ne oa ket pemzek vloaz,  
Ar plac'hik a zouge he c'hroaz. (bis)

E c'harz ar mor, war eur garrek  
Kaourintinik 'wele dourek. (bis)

A greiz he c'halon he feden  
A zavaz d'ann env evel-hen : (bis)

• O stourm oc'h listri ar Zaozon  
• Va zad zo beuzet er mor don. (bis)

• Kalon va mamm baour a rannaz  
• Gant ar c'helou-ze pa glevaz. (bis)

• Me n'em euz den... allaz ! brema,  
• Petra rinn-me war ar bed-ma ? (bis)

• Me n'em euz mui war ann douar,  
• Na tad, na mamm, na kar, na par. (bis)

• Na tad, na mamm, na kar, na par ;  
• Va buez vo kaon ha glac'har. (bis)

• — Nann !... ar paour enn env deuz eunn tad,  
• Hag e Remengol eur vamm vad !... (bis)

• Va mamm d'in e deuz lavaret  
• Pedi ar Werc'hez binniget, (bis)

• Pedi Gwerc'hez vad Remengol,  
• Ha ne dajen biken da goll. (bis)

• Astennit 'ta ho torn zantel,  
• Gwerc'hez, brema war ho pugel ! (bis)

• Me, minorez paour dilezet,  
• War va zreid noaz iel d'ho kwelet, (bis)

• War va zreid noas'z'inn d'ho kwelet,  
• D'ho ti, d'oc'h ilis *holl remed.* (bis)

• Seiz tro a rinn d'ann aoter vraz,  
• War va daoulin, d'ar pardoun braz, (bis)

• Ha seiz tro d'oc'h iliz zantel,  
• Gwerc'hez, Patronez Breiz-Izel. (bis)

• Ann dud kez, Itron Varia,  
• Da rei deoc'h n'o deve netra, (bis)

• Na gouriz koar, na goulaouen,  
• Netra, netra, met ho feden. (bis)

• Evel-t-ho, siouaz ! me zo paour,  
• N'a meuz met ma bleo melen aour.. (bis)

• Me a roi dec'h eur gurunen  
• A vo gret gant ma bleo melen, (bis)

• Gret gant bleuniou koant ar parkou,  
• Ha glizennet gant ma daelou. • (bis)

Eat oe enn hent kaourintinik,  
Enn he dorn eur wialennik, (bis)

Enn he c'halon, feiz, karantez,  
Ha nerz deut digant ar Werc'hez. (bis)

Treuzet ar mor, e ma enn hent  
A gas d'ann env, da gaout ar zent. (bis)

Tostad a ra, ne ma mui pell ;  
Gwelet e deus ann tour zantel. (bis)

P'e deuz gwelet, eo daoulinet,  
Hag he c'halon en deuz tridet. (bis)

E Remengol p'en em gavaz,  
Da dreid ar Werc'hez e pokaz (bis)

O lavarout : « Va Mamm zantel,  
• Ama me a garfe mervel!!!... (bis)

• Me n'am euz den!... paour kez plac'hik,  
• Kasit gan-e-hoc'h Kaourintinik!... (bis)

• Ama va c'horf a repozo,  
• Gan-e-hoc'h va ene a ielo!!! • (bis)

Hag ar Werc'hez gant karantez  
A lavaraz d'ar plac'hik kez : (bis)

• War ann douar zo tud diroll,  
• Va bugel, mar dafez da goll!!!... (bis)

• Da ene ha da galon baour  
• Zo brema kaer evel ann aour.. (bis)

• Kaourintinik, kerz d'ann envou  
• Da veuli Jezuz hon Aotrou. • (bis)

Kaourintinik enn eur vervel  
A lavare a vouez huel : (bis)

• D'ar Werc'hez me ro va c'halon,  
• Ha va malloz gant ar Zaozon!!! • (bis)

I.-P.-M. AR SKOUR,  
Barz ann Itron-Varia Remengol.

*Lanhuon, intañvez Ar Goffik, mouler.*